

Dezougen

Ruilhañ hag arboellañ



Kevin Meresse, ijinour war an diorren ha Gilles Debrix, rener ar stal

D’ar c’houlz ma kresk priz an dour-tan e poagn an holl da stourm ouzh an dispignoù. Kenweturañ a ra lod tud evit digreskiñ o frejoù-hent.

Abaoe 6 miz emañ Gilles Debrix o labourat e Brest. Goude bezañ bet kazetenner war dachenn ar sportoù mor en deus kuitaet Cherbourg evit dont da Vrest evel rener al lec’hienn internet “Roulez Malin”. “Betek-henn ne oa ket a rener en ti met kresket kalz eo ar stal.” a zispleg eñ. Unan eus koshañ lec’hienn kenweturañ ar vro eo “Roulez Malin”, bet savet e 2005 diwar goulenn ar C’huzul-Meur hag a felle dezhañ reiñ lañs d’un doare nevez da vont gant an hent. “Abred-tre o doa komprenet ne oa ket trawalc’h kaout leurioù-kenweturañ, kaout panelloù ha kement zo ma ne vez ket broudet an dud da implij anezho.” Evit se e oant deuet e darempred gant un embregerezh war ar c’hehentiñ, Hyppocampe, ha savet ez eus bet goude an embregerezh “Roulez Malin”, dezhi 4,5 post. Bemdez, e Penn-ar-Bed hag Aodoù an Arvor, e vez war-dro 10000 den o tennañ gounid eus o servijoù. “Servijoù digoust, ouzhpenn-se. D’an dud a ya asambles gant ar memes karr d’en em glevet.” a resisa Gilles Debrix. Setu perak, sur e kresk kement an ezhommoù, betek +25% war 2011 e Penn-ar-Bed.

War astenn

En ur ober 7 vloaz eo bet kresket kalz an ezhommoù. Lec’hiennoù gouestlet d’ar c’henweturañ a gaver e kalzik departamantoù, etre 50 ha 70% anezho. Un dek bennak eus ar re-se a vez meret gant “Roulez Malin” met kinnig a reont ivez

o servijoù d’an embregerezhioù, evel lfremer pe reoù all a seurt-se. “Pa n’eo ket gouest an embregerezhioù da greskiñ ar goprou e c’hellont aesaat buhez o implijidi dre lakaat frejoù-hent ar re-mañ da zigreskiñ. Bez’ e c’hell mont betek lakaat anezho da arboellañ 2000€ ar bloaz, talvoudegezh ur miz labour.” a zispleg c’hoazh ar rener. Labourat a reont war merañ park kirri an embregerezhioù, evit chom hep ober gant re a girri ha pratikoù o deus betek Nissa, en o zouez embregerezhioù bras evel Caisse d’Epargne, Veolia pe c’hoazh Stade de France. War-zu ar c’hornog o deus ivez un 30 embregerezh vras ha strollegezhioù lec’hel.

Modoù nevez

Pa vez ur marc’had o tiorren e teu ivez stalioù all da glask fred ha gouzout a ra Gilles Debrix e ranko mont war-raok evit gellout derc’hel d’o renk. Evit ar stal vreizhat nemeti war an dachenn-se n’eo ket aes derc’hel penn d’ar vazh a-dal da embregerezhioù broadel. Setu m’o deus ijinat un doare nevez d’ober, en ur implij ar pellgomzeroù hezoug, a vo lakaet e pleustr dindan bloaz dindan anv ar raktres MobiBreizh, gant kenlabour Haploid, ur stal eus Lannuon, hag an Telecom. Nevez zo o deus tapet kaout al label a roer da vinvioù an trede rummad ha bremañ emaint o c’hortoz kaout skoazelloù a-berzh ar strollegezhioù. Gant ar sistem-se e c’hello ‘forzh piv gouzout, goude sellout ouzh e bellgomzer, ha tud nepell outañ a zo, dres er mare m’emañ o klask, evit kenweturañ. “Tostaat a raimp evel-se ouzh hon orinoù, ar c’hoari biz-meud.” eme paotr Cherbourg. E 2012 e vo graet taolioù-esae e bro Lannuon ha gortozet e vo 2013 evit ledanaat ar c’hinnig da Vrest ha da Vreizh a-bezh.

Kenwerzh

Gant nerzh an avel

E-kreiz an Atlantel emañ Breizh, ul lec’h dispar evit kenurzhiañ beajoù kenwerzh etre Norzh ha Su. Trawalc’h eo bet da c’h/Guillaume Le Grand evit sevel e embregerezh, Towt.

N’eo Guillaume Le Grand nemet 29 bloaz ha kouslkoade e oar eo dav d’ar bed kaout doareoù all da vont en-dro hag arboellañ an energiezh. Ar paotr bihan en deus desket mont war vor gant e dad-kozh etre Benoded ha Douarnenez hag ur wech deuet koshoc’h, war-dro 24 bloaz, eo deuet dezhañ ar soñj implij nerzh an avel – ac’halese ar W eus Towt, evit “wind” – evit mont d’ober kenwerzh etrebroadel. Ur wech bet ali studierien skol genwerzh Clermont-Ferrand e kred mont pelloc’h. “Dedennus e oa kaout ali tud a zo pell eus an dachenn, unan a-ziavaez eo.” emezañ. Dibabet eo. Krouiñ a raio e stal, Towt, e doare “auto-entrepreneur”. E miz Meurzh 2011 e krog ganti. 2,5 bost a zo bremañ dija gant Towt.

Tres Hombres hag Irene

E miz Here e teue an Tres Hombres betek Brest gant nerzh an avel. En he bourzh kafe, rom, kakao o tont eus en tu all d’ar mor met ivez kaotigell ha chug-frouezh bet karget e Den Helder, en Izelvroioù, ha bier bet karget e Bryxham, en Devon. Dasparzhet e oant bet e stalioù ar vro, en o zouez kalz a stalioù Biocoop. “Tud zo a gred dezho omp sot. Tregont vloaz zo e oa ivez tud a grede e oa sot paotred ar bio. 30 vloaz war-lerc’h o deus graet ar re-se o hent. Gwelet e vo petra a vo lâret ouzhomp ‘benn 30 vloaz.” a embann sklaer paotr yaouank ar Yeuc’h. E miz C’hwevrer e oa tro Irene, ur vag dre lien 135 metrad hec’h hirder, d’ober un arsav e Brest, amzer diskargañ ar 5 tonenn bier Avocet – 4000 boutailh un 12litrad dezho – produet en Devon gant Exceter Browery “Plijout a ra an evaj-se d’an dud rak degas a ra da soñj dezho eus an aergelc’h o deus tañvaet er pub-où, en tu all d’ar mor. Hag ouzhpenn eo un “ale”, un tamm disheñvel ouzh ar bier a reompli er vro.” a zispak-eñ evit reiñ da gompren penaos eo priziet mat ar varc’hadourezh. Dindan nebeut eo bet skignet en un 30 stal bennak, en o zouez un 20 Biocoop, eus Breizh a-bezh ha betek La Rochelle.

Fakturrenn Karbon

Evit ar poent n’eo ar beajoù-se nemet taolioù esae rak rankout a ra tennañ gounid eus beajoù aozet gant bigi-stummañ o tremen dre Vreizh, o tont eus pell, o vont pelloc’h goude, betek ar Brazil evit Irene, da skouer. Evit ar poent en deus ezhomm da gaout tud a-youl-

vat evit mont gantañ war ar vag evit treuziñ mor Breizh etre Plymouth ha Brest. Met kalz pelloc’h e wel Guillaume Le Grand, broudet ma vez gant an heklek a gav d’e broduioù. Niverus eo e raktresoù. Lakaat eoul olivez da zont eus Andalouzia, produioù all da ziskenn eus Skandinavia... “A-drugarez d’an avel, da geñver ur vag all, e vez digresket ar frejoù energiezh eus 90%.” Ouzhpenn da-se e plij dezhañ ar mennozh lakaat an dud da gejañ, an eil re ouzh ar re all, paotred Breizh vihan gant paotred Breizh-Veur. Evit ma vo ar mor ul liamm hag an avel ur broud. Ur wech e Breizh emañ-eñ o klask marc’hadoù. Produerien deus un tu. Pratikoù deus un tu all. Ha goude c’hoazh eo dav kaout ar vag d’ober al liamm. Kaoz a zo gantañ eus ar Black Rose, eus an Tres Hombres hag Irene evel-just, met ivez eus ar Picten Castle, un teir gwern a Vro-Ganada. Buhez a vo c’hoazh e porzhioù Breizh.



Guillaume Le Grand dirak ar marc’hadourezh

LIORZH

Bleunioù ar gwez kraoñ kelvez



Kraoñ kelvez e bleuñv

Devezhioù brav hon eus bet. Ur blijadur e oa ar sizhun-mañ gwelet ar bokedoù-laezh en o bleuñv. Liv an nevez-amzer a seblant goloñ an natur a-bezh. Gwelet e vez ar bleunioù roz-kamm o tiskouez o fennoù hag ar broñsoù ouzh ar gwez o c’hoefviñ. Ma sellit pizh e c’hellit gwelet bleunioù-mamm ar gwez-kelvez. Bihan ha koantik int ha dianavezet gant an dud, a soñj dezho n’eus nemet bisig ouzh ar gwez-se. Ret e vo deoc’h tostaat ha sellet a dost ouzh ar vlefchenn. Sellit e-kichen al lec’h m’emañ staget ar bisig. Gwelout a rit anezho ? Tener ha ruz ? Ha brav o liv hag o stumm ? Talvezout a ra ar boan mont da welout anezho !

Kendalc’het hon eus gant al labour er park. Un heskennerez a zo bet prestet deomp hag aesoc’h eo bet deomp troc’hañ an iliaev a aloube ar gwezennoù-derv a zo war ar c’hleuz. Kement a iliaev a zo warno ma n’eo ket posupl gwelet

mat o stumm. Kouslkoade eo bras an dervenned. Ret e vo deomp gortoz un tammig evit gwelet efedoù hol labour. Souezhus eo gwelet pegen tev e c’hell kef an iliaev dont da vezañ. Mougañ a ra ar wezenn m’emañ o aloubiñ tamm-ha-tamm. Ar ruskenn ma pign an iliaev outi a vez gwastet tamm-ha tamm gant “gwriennioù” an iliaev ha ne servijont nemet da gratat ouzh ar wezenn. Alies e soñj d’an dud e vez sunet ar gwez ganto met n’eo ket gwir tamm ebet, stardet e vez tamm-ha-tamm ha skeud an iliaev a harz anezhañ da gaout ar sklêrijenn he defe ezhomm evit ur c’henaoz-luc’h* efedus. An uhelvarr an hini eo a gemer startijenn ar wezenn ma vev warni.

holliorz@gmail.com
FD ha JYD

* Luc’hkevanaoz : photosynthèse